

Au fol° 58 recto, seulement le titre :

(58 recto)

Menec'h an enez glas .

(58 verso)

Menec'h an enez glas .

Me a moa bed eur c'hoarek vad-
Lac'hed e bed gant an Abbad ,

Lac'hed e bed ha violet
Gant menac'h er gouent danvet .

E man duman war ar bili
Er goad o redek deus he fii ;

E man duman war ar bizin
E c'horf paour glas evel glizin ;

E man duman , he bleo melen
Merket gant fang en dro d'he fen ;

E man duman en he gourve
Sellet outi zo eun drue .

O ma Doue ! possub a ve
A renfe pel er sort tuol - se ?

(61 verso)⁽¹⁾

Ar c'h eskop Dol a levere
En he Gathedral en de se :

— War eur garek en Enez glas
Zo 7^r manati Kreiz er mor bras .

(1). — Le texte du fol° 61 verso se place ici, d'après le texte de la version suivante (fol° 64-66). — Mauvais classement et par suite mauvaise pagination de ce fol° 61.

Kreis er mor bras zo eur gouent
Savet goeac'h all gant er Soent.

Med ar venac'h a zo enou
Na studiont ken ho levrrou.

Ho zorfjeou pa n'ho c'hleunan
A laka ma c'halon da Spontan

Mallos dar venac'h zo er vro,
Vel er (1) bleidi bars er c'hoajo!

Mallos war n'he, mallos an dud,
Mallos an en, all loened mud!

Dar venec'h zo en Enez - c'hlas
mallos taer goec'h ha mallos c'hoas.

(59 verso)

hag ar Pring meur a levere
War dor e bales en de se :

— Mar ge me zo mest er vroman
A lerer Breiz - izel a nean,

Me a disko dar vinic'h
Lerel en feuc'h ma sujidi,

D'ar venec'h du, dar venac'h gwen
Lerel en feuc'h ma gvir vijen.

Me a savo eun arme vras
Wit distrujan an Enez - glas

hag er wenac'h a vo enni
Erit na hechappo hini.

Pa c'he ar manac'h bras d'er grouk
E c'he ar charub war he chouk,

(60 verso)

(1). — D'abord : ar ; e (de : er) en surcharge sur a.

Eur chalei aour en he gerchen
Eun dismeganz dar veleien.

Ar manac'h bras a levere
war lein ar Skeul pa n' arrie :

— Muñ a ver'het meus violet
Wit zo aman eus ma sellet ;

Muñ a sakrilej e meus groet
wit zo neuden bars en roket.

A c'hoas a c'houllan rok mervel
Ma Koës gvalen war Breiz-izel.

7

[pas de traduction française :
rien aux 59, 60 et 61 rectos.]